

Ur gensavenn bolitikel evit gwirioù pobl Vreizh



Ur gensavenn zo bet kinniget d'ar 4 a viz Ebrel e Roazhon gant Ai'ta!, EELV Breizh, an tu kleiz dizalc'hour (Breizhistance-I.S.), Kevre Breizh, MBP (Mouvement Bretagne et Progrès), Strollad Breizh, UDB, 44=Breizh ha Breizh Unvan. Da-heul kinnig ar manifesto e kavot ur pennad-kaoz gant unan eus perzhidi ar gensavenn, Charlie Grall [p.9-10].

Ur forum a vo kinniget gant tud ar gensavenn e Naoned, d'ar 15 a viz Even, dres pa vo forum Gwirioù Mab-den, skoazellet gant Kuzul-rannvro Broioù-al-Liger o klozañ.

Logo "Galv Pondi" a ginnig ur erminig o skediñ gant ar pevar rummad bannoù melen, ha war memes tro, tres azezennoù ur parlamant.



d iwar ul labour a-stroll eo deuet ar gensavenn. Drezi e fell da gensinerien gentañ "Roomp frankiz d'an energiezhioù e Breizh" degas cheñchamant ha muioc'h a zemokratelezh e Breizh en ur vrudañ an arc'hadurioù e-touez pobl Vreizh.

PEVAR FOENT AR MANIFESTO

Peurwiriekaat Karta Europa ar yezhoù bihanniver, evel ma oa bet prometet gant prezidant ar Republik, François Hollande, hag ivez ma vo lakaet votañ ul lezenn-stern da reiñ, a-benn ar fin, ur statud d'ar yezhoù "rannvro", dezho da vezañ anavezet ez ofisiel, rak paneve se ne vo ket saveteet ar brezhoneg hag ar gallaoueg. Ret eo d'ar Stad lezel frankiz gant Breizh da ziazezañ ur statud kenofisiel evit he yezhoù abalamour da reiñ dezho un amzer da zont.

Adunvaniñ Breizh, e-barzh ar stern lezennel nevez-se, ur strollegezh hepken a vo kendeuzet enni an departamantoù hag ar rannvro.

Krouiñ ur gwir skinwel publik divyezhek, diwar skouer Via Stella e Korsika, gant harp an teknikoù hag an dud a vicher a zo

er vro dija. Skignañ a raio e pemp departamant Breizh, kinniget e vo gantañ 30 eurvezh abadennoù brezhonek bep sizhun d'an nebeutañ ha roet e vo e blas d'ar gallaoueg ivez. Er pol-media nevez-se e vo ivez **ur skingomz publik** hag a skigno abadennoù e galleg, e brezhoneg hag e gallaoueg e Breizh a-bezh.

Reiñ, dre al lezenn digreizennañ da zont, **ur statud disheñvel da Vreizh** evel ma'z eus gant "rannvroioù bras" Europa (Skos, Kembre, Katalonia o deus ur gwir parlamant gantañ galloudoù a bouez), da lavarout eo ur vodadenn ganti barregezhioù nevez, ur galloud lezenniñ ha reoliñ hag ar gwir da armodiñ war meur a dachenn, eus an dour, ar sevenadur betek ar politikerezh yezh. Ret e vo, da-heul ar barregezhioù nevez-se, kaout ur budjed ha telloù da gordañ, abalamour da vezañ gouest da respont d'an dalc'hoù da zont war an tachennoù armerzhel, sokial, sevenadurel hag hini an endro.

KOULZAD SINAÑ

Ur c'houlzad sinañ zo bet lañset war bajenn o lec'hienn e lec'h ma kaver tenn divyezhek ar galv ha pennadoù titou-

riñ. En un doare hiniennel eo bet kelaouet kannaded ha senedourien Breizh hag ar guzulierien-departamant. Sinet eo bet evit ar mare gant François de Rugy (EELV, Naoned) ha Jean-Luc Bleunven (tu kleiz, Brest). Estreget politikourien a sav a-du pa ouzer e c'halv Diwan Breizh, Div Yezh, peotramant emglevioù-bro zo da sevel a-du gant an arc'hadurioù.

War an dachenn eo krog perzhidi ar gensavenn da labourat, o vont da gejañ gant ar Vretoned. D'ar 15 a viz Even e talc'hint ur forum keodedel e Naoned da vare hini gwirioù Mab-Den. Kinniget e vo ar gensavenn ha displeget e peseurt mod emaint e soñj lakaat an arc'hadurioù da vont war-raok. Gellout a ray ar boblañs kaozeal gant perzhidi ar gensavenn met ivez gant dileuridi euskarat ha katalan. Kinnig a raio dileuridi kensavenn Batera¹, eus Euskadi an hanternoz, aozadur o botadeg keodedel war grouidigezh ur strollegezh tiriadel e 2010. Un dileurierezh eus Katalonia a ginnigo ar votadeg keodedel war an dizalc'houriezh eno.

Fabris Cadou

1. S.O. WWW.BATERA.INFO

Evit gouzout hiroc'h : <http://GALVPONDI.NET>